

ANN · HOLLAIKA

Disul vintin a-ba zaviz mont da gas ma zaoud er mez,
 Me cleve va dous o kana hag he anaiz diouc'h he moez,
 Me cleve va dous o kana , kana ge war er menez,
 Ma me mont da zevel eur son da gana gant-hi iveau.

-Ar c'henta gwech em euz gwelet Mac'haidik koant, va
 mestrez
 Oa oc'h ober he fask kenta ebarz iliz ar parrez
 Ekreiz tre barz iliz Fouesnant etouez ar vuzele
 D'er pred-ze e doa daouzek vloaz, ha me daouzek vloaz
 ive.

Evel ar bleun melen balan, pe'vel ar rozennik-gwez,
 Vel-ar rozen gwez'touez al lan, oa etre-z-ho, va mestrez
 Tra oanh bet gant annoteren met sellet out-hi na renn
 seul vui-oc'h-vui out-hi zellern, seul vui oc'h vui
 plije d'en.

Me'm euz eur ween e liorz va mamm a zo karget avalou
 ILageunn dachennik c'hlaz dindan, hag eur voden tro-
 war-drou:

Pa zeuio va douzik-koantik, va muia-karet d'am zi,
 Ni a ielo da zisheolia, va dous ha me, dindan hi.

Ann aval ruan a dapinn, hag eur boked rinn'vit hi
 Hag eur rozinil a garren e likirn iveau em hi,
 Eur rozinilik gwall c'hoervet, abalamour d'am enkrez,
 Rag n'em euz ket bet c'hoaz gant hi eur bouch a wir
 garantez.

-Tavit gant ho son, ya migion, tavit prim, gant ho komzaou
 Ann dud o vont d'ann oferen zo em traon ouz hor silaou
 Eur wech-all pa zeuliemp d'al lann, ha vemp hon unan
 hon daou.
 Eur bouchig a wir garantez a roium d'hoc'h, unan,
 pe zaou.

Ont participé à la réalisation de ce numero d'ETE :
 Armel CALVE - Guy CLEC'H - Georges DUNIL - Fran-
 coise HAMON - André HAMON - Antoinette ROMAIN -

DIRECTEUR DE LA PUBLICATION :

ANDRÉ - GEORGES HAMON

AN TEODEG : 12, rue du 14 juillet. Les Lilas.